

CHANSON NEVEZ

1.

Apollon tad eloquant mé a invoq da bouar,
 Discoël da lagat brillant ha sel ous ma glac'har ;
 Rac ar sujet deus eur sôn a meus c'hoant da rimâ,
 Mes compos dei eun ton , ne allan quet cana.

2.

Troublet eze ma oll sañs , ma speret chagrinet ,
 Tristet e he ma c'halon , ma memoar tourmantet ,
 Deus a sonjou eur fleuren a so quen caer ha quen pur ,
 Goechal pa sonjen enni me a moa plijadur .

3.

Pemp bloa ameus tremenet , pemp bloa on deus collet ,
 Aboe deus a hanon bars em c'halon blesset ,
 Me meus caët ar re-se berroc'h vit pemzec de ,
 Aboe e zon o languissan ho sonjal nos a de .

4.

Penos Venus traïtourez , ma lezes Cupidon
 Da hoarzin , da folatrin en jardin ma c'halon ;
 Ha te o voelet an daërou continuellamant
 O tont deus ma daoulagad hep caët cessamant ,

5.

Soëzet oc'h auditoret , me gred ezoc'h soëzet ,
 Pa ne meus quet ar sujet aman dizoloet ,
 Me laro dec'h ar gruellan demeus an oll boanniou
 E separi diou galon , difreza ho yeuiou .

6.

Ret eo breman separi diou galon unisset ,
 Pa na bermet an natur eveint-hi assamblet ,
 Choui tud yaouanq . tud fidél , hac oc'h eus amitie ,
 Juget hac en so er bed brassoc'h captivite .

7.

Me a so prisonnier a test deus ma bue
 Ha quentoc'h vit mervel , so disquennet em be ;
 Ma mestrezic a so ive couls a me captives
 Separet on diouti , allas ! evit james .

8.

Pichounet ha c'houi coulmet , loenedigou Venus ,
 Turzunellet consolant a gri quen hirvoudus .
 Po clewan o hirvoudin e sempla ma c'halon
 Ebars e creis ma yaouanqis pebes punition .

9.

Me as ped eonic bian , te a.teus diou esquel ,
 Cas evidon eur liser d'am mestrezic fidel ,
 So dictet gant an Amour dre huanadennou ,
 Ma defo sonch a hanou betec fin e deiou .

10.

Lar dei rei dit ma c'halon so ganti enfermet ,
 En eur plaç delicius gant an amouroustet ;
 Be diganti eur lizer quent retorn voar da c'his ,
 A vo scrivet em faveur gant an dorm am languis .

11.

Nin so n'em separet gant calz deus a regret
 Ha c'hoas n'em requetomp ep gallout en laret ,
 Dre ma sellou languissant entre ma he goelin ,
 Ep gallout enim ampech , me ho car , a lerin....

12.

Oh ! pebeus chanchamanchou a gavan bars em stad
 Ar c'housquet , tranquillament a serre ma lagad ;
 Me a lezè ma c'halon da garet ma mestres
 Na brema n'on quet capabl da dont de c'hancoués .

13.

Arsa ta guerset yaouanq , hoas quent vit finissan ,
 Na lezet quet ho calon da garet evel ma ran ;
 Credet ahanou guerset pa ver o separin ,
 E teu eur galon tener da garet mui ous mui .

14.

Bremâ me a vew tranquil ebars em captivite ,
 Me a lès an dud yaouanq da redec nos a de ,
 Me a ve o repos a neuze o sanjal
 En g'enet ma mestrezic p'e goelin guechal .

F. LECAVALIER.

E ty Ar Goffic , e Lannuon .

MARI BEG A ROG HA FRI PARTOUT

Var ton : *Son an dançou.*

Mar oc'h eus c'hoant, va mignonet, d'a anveout eur vreg rog,
Me o kunduo, pa guerfet, dirag Mari beg a rog,
Bemde var dro eun heur anter e cluc'h var treujou e dor,
Kerkent teodou pig ar c'hartier gant eur skaoun pe eur gador
A zired oll en e c'hever; an audianç so digor,

Var barlen Mari e veler eur pes foultren assied,
Var bini e cont pep kommer kement e deus inventet;
Klevet a rêt pet den lipous a ya bemde d'ar c'hafe,
Pet plac'h e deus tri amourous, ha pet a zo stad enne:
Pet ozac'h a zo mewier, ha pet a bil o grague.

Mari beg a rog a gommard var ar c'honseil divragou,
Eb kaout an nebeuta damant e tigor franck e guenou,
Pa ne deveus var e bizach na moustachou na baro
E red dêi kaout an avantaj da zikrial tud ar vro,
Guêvier, sotoui, kos langach, flud a bep kalite zo.

Mari beg a rog so titret vel an huella noblanç,
Dommaj ê n'en d'ê ket pried d'eun den pinvidik a Franc;
I ê princes an diegi, comtes al liboudennou;
I ê dukes al loustoni, marquises ar strakellou;
Gouarneres ar jolori, baronez ar pillow,

Kerkent a ma ve imbannet daou den yaouank da zimi,
E ve, d'al lun vintin, galvet e c'honseil bras gant Mari;
Pep konseiller en queleden a boagu gant e vouton bêr,

Evit klask ar guellan moyen da derri pront an affer.
Ar plac'h a gar ar jigoden , pe ar goas a ve mèvier.

Ar re voassa da zikrial an dud a ya en fortun ,
A zo , evit an ordinal , merc' hed chommet eb nikun ;
Merc' hed kes chommet da goza eb tapout eun tamik goas,
Hac a gommanç brêma facha, dre ma ne deu den d'ho choas,
Couskoude an hini gossa n'ê ket tri-uguent vloa c'hoas.

Kerkent ha ma vel eun eured o lont varzu an Ilis ,
Mari beg a rog a zired en manchou lous e hinvis ;
Evel eur vioc'h ho vreskin e c'haloup abiou ar ru ;
Holà ! Catel, Jeannet, Perrin, Soas, Mac'harid, deut dious-tu.
Cetu aman eured Martin , deut da dremen ar rêvu.

Va c'hommer sellit eus hounes , dislivet e davancher
E c'horнетен zo eb ampes , hac e gueleden re vîr ;
Ho ! sellit-ta eus an den-man , pegen striz ê e vrugou .
E dog so brassoc'h evitan ; ha kals re hir e vontou ,
Eur chimizeten so gantan var a rochet en pillow !

Pa ve eur vreg kes gouilloudet , divars e bugen kental ,
E c'houlen Mari estonet ; petra , nao mis so dija ?
Me gave din voa an eured d'al lun goude pardon Pôl .
Ha pask n'ê ket c'hoas erruet ; allon ! grêd o deus an tol
Eb n'o deveus va c'hemennet , an dra ze a gavan drol .

Pa gleô kloc'h Ilis ar barrous o c'hervel d'eur vadiant
Mari gant eun troad eb botes , a erru arog ar chant ;
Mæs, dre valheur n'eus ket ezom demeus eur voues ken raouliet
Da zikour kana *Te Deum* evit an nêve gatet .
Gant e c'hommerezet e chom e kichen dor ar vêret .

En ty ar Goffik en Lannuon.